

KANTIK

Itron Varia-Blouaret

Patronez parrouz Plouaret,
Ni ho ped a greiz-kalon,
Rag Mam oc'h da Zalver ar bed,
Mam d'imp ive, hag Itron !

DISKAN

*Itron Varia-Blouaret,
Patronez vad ha santel,
Roët sklerijenn d'hon spered,
Nerz d'hon c'halon, ha skoazel
Ewit chom gwir gristenien,
Hag ho karout da viken ! (bis).*

An drouk-spered na baouëz ket
Da iedal 'n dro-d'imp noz-de !
Hon jikouret da stourm bepred,
Ha 'diwallet hon ine !

Ar bed, gant he stigno kuset,
A glask distrei hon zello
Deuz hent ar gwir evurusted,
Deuz hent an env hon gwir vro !

En hon c'hreiz a ve kann ive
Etre ar vad hag ar fall ;
Aliez, ziouaz, hon ine
Deuz hon c'horf a renk diwall !

Pa deuiio anken ha glac'har
Da rannan hon c'halono.
Mam vad, na vezet ket digar,
Deut da stankan hon daëro !

Gwerc'hez, dinam a bep pec'hed,
Miret ine ar bugel ;
Gret ma vezo bepred sturiet
Gant eur vam fur ha zantel !

En tad evel er vam gristen
Grouïennet erfad ar fe,
Gret ma vo miret penn-da-benn
En o zi lezen Doue !

Gret ma kerzo ar iaouankiz
Dalc'hmad en hent ar furnez ;

Ma tarempredo an iliz,
M'ho karo dreist-holl, Gwerc'hez !

Harpet an den en e gozni
Gant ho prec'h madelezus,
Ha jikouret kement hini
A zo aman maluruz !

Gwerc'hez, daoulinet 'n'hoc'h iliz
E c'houlenomp ho pennoz ;
Binniget ho parousianiz,
Kaset 'n-e d'ar baradoz !

Ma kavomp ken kaër ho skeuden
War hon gweren-vraz liwet,
Pegen kaër 'vo 'ta da viken
En hon gwir-vro ho kwelet !

Y.-M. G.

Evêché de Saint-Brieuc et Tréguier, 22 Novembre 1905

Imprimatur :

AUG. CHATTON, *ch. vic. gén.*

